

DA ZAN VAUDEZ



VAR DÒN : *Goùtez, âmes ferventes.*

I

Gant hon c'haëran kantikou,
Hag a-greiz hon c'halon,
Enori ho relegou
A fell d'imp, Zant Patron.

Diskant

Sant Vaudez, Patron karet,
Chelaouet pedennou
Ho pugale daoulinet
Dirak ho relegou (*bis*).

E-kreiz nerz hoc'h iaouankiz
C'hui guitaz mamm ha tad
'Vid digas da Dregeriz
Tenzor ar *c'belou-mad*.

Gant hon zadou c'heuz bevet
Hed kalz a vlaveziou ;
Liez gant-he c'heuz gouélet
Ha dousat ho foaniou.

Pegen mad oa ho komzou !
Gant pebez karante
E roent ho c'halonou
D'ac'h-hu, mignon Doue !

II

Pell-zo da c'hloar ann Envou
Gand Doue oc'h galvet,
Hag evit ho vertuïou
En deuz ho kurunet.

Chelaouet ho pugale
Hirie, o Tad karet :
Ho c'halon, ho c'harante
D'ac'h a vezo bepred.

Sant evuruz, hon Patron,
C'hui henchas hon zadou ;
Gret d'imp kaout nerz-kalon
Da c'honid ann Envou.

Goulennet bennoz Doue
D'ann tadou, d'ar mammou,
Furnez-vad d'ar vugale
'Vit kerzat n'hoc'h roudou.

Euz a bep drouk hon miret,
Patron karantezuz,
Var *ho parroç* astennet
Ho torn madelezuz.

Binniget tiez, parkou ;
Hag hon zud diwallet,
Pa grozo ar gwagennou,
Var ar môr fuloret.

Var ar gwagennou renet,
Ha lestr ha merdead,
Ha d'ar porz ho digaset
D'ar c'houlz, divlamm dalc'hmad.

III

Ni a gar ar bod spern-guenn
Ouz garrek ho kadôr (1) ;
Ni a gar hoc'h enezenn
Edro d'ez-hi ar môr (2),

Ann enezenn zantellet
Dre ho pinijennou
E sav diout-hi bepred
C'houez-vad ho vertuïou.

Ni blij d'imp mond da bedi
Du-hont d'hoc'h enezenn :
Elec'h oc'h euz pedet, c'hui,
'Ve krenvoc'h ar beden.

(1) E krec'h-Ormant.

(2) Enezenn Vaudez.

Deuz ann douar distaget,
Vel ann enez ive,
D'ann env ar beden kaset
A zav c'huekoc'h a ze.

IV

Ra vezo ho pugale
Bepred guir gristenien ;
Neuze vo mad ho bue
Ha kaër ho c'hurunen.

Ha pa vimp er baradoz,
O sant Vaudez karet,
Ni gâno d'ac'h mil bennoz
Hak ho karo bepred.

IMPRIMATUR :

Riquier
person Kergist

Brioci, die 25 aug. 1893.

A. CHATTON, *can.. vic. gén.*